

8. Roet 'n eus ive ar vuhe
 Da vab eun otrou meur
 'Oa lac'het, pebez true!
 O c'hoari gant e vreur.
 War-lerc'h ar seurt burzudou
 'Voe karet gant an holl
 Ha brudet-bras, ma zudou,
 Er vro-mañ ha dre-holl.

9. 'N eur c'heo dindan an douar
 E varvas hon zant mat
 A-barz mont d'al lec'h klouar,
 Da varadoz hon Tad.
 'Rôk mervel, pebez dudi!
 'Savas eur chapel goant
 Gant Botmael ha gant Tudi
 A oa ive daou zant.

10. Enoret eo e Lennon
 Sant Mode en Nac'h-Gwenn,
 Eur chapel tost d'hon c'halon
 'Lec'h 'ma ar Werc'hez wenn
 O roi d'he farrezioniz
 Skoazell ha « kelou mat ».
 Dreizo Doue, Lennoniz,
 Hon digemero mat.

IMPRIMATUR :

Kemper, 9 a viz Here 1952.

M. HÉRVÉ, *nikel bras*.

Kemper, Ti-Moulerrez Bro-Gerne.



DA ZANT MODE

*An diskan 'zo war eun ton keltiek, hini kantik
 treizidi an « Titanic » : Me gred ebnout, ma Doue ;
 e galleg : Je crois en toi, mon Dieu.*

*Ar pozioù 'zo war don Patronez dous ar Folgoad.
 Ne vo kanet an diskan nemet diou vech, a-rôk
 ha war-lerc'h ar c'hantik.*



DISKAN :

*Sant Mode, mignon mat,
Skoazell hon bro,
Pedit Doue, hon Tad,
M'hon divoallo.
Ma vo parrez Lennon
Tost atô d'E galon
Ha ma vimp da Zoue
Gwir vugale.*

1. Sant Mode, sant benniget,
Ken bras atô e vrud,
Kalz a-rôk ma voe ganet
'Voe gouestlet gant e dud
Da Zoue, hon gwir otru,
Hon mestr ker hag hon tad,
Da vont 'harz E oteriu
D'E zervicha ervat.
2. E dad, roue Iwerzon,
Dek mab en devoa bet.
Met a-greiz holl e galon
'Voe goasket start meurbet
Pa gollas nao anezo,
Diskaret 'kreiz o brud
Ha sammet, siouaz d'ezo !
Gant eun droug kri ha yud.
3. Sant Mode, dre al lezenn,
Susitour 'oa d'e dad
Da c'houarn an enezenn
Pa vije deut en oad.
Eur briñsez a voe klasket,
Eur plac'h kaer hag a don,
Da roi d'ezan da bried
'Barz pignat war an tron.

4. Eur pried eus an douar
Ne felle ket d'ar zant :
Mari, hon mestrez klouar,
A oa bepred e c'hoant.
Ha, setu war e bedenn,
Ma teuas, 'n eun tól-kont,
Goradou leiz e groc'hen
Ken a voe eur gwir spont.
5. Da c'houde ' voe beleget
Ha setu heññ da Vreiz
Da skigna, gant kalz aked,
Gwirioneou ar feiz,
Ha, dirak hon c'hentadou,
Souezet-bras meurbet,
E reas kalz burzudou
Keit ma voe war ar bed.
6. Sant Tual a Landreger,
Ken karet 'barz ar vro,
En devoe outañ preder
Ha neuze, tro-war-dro,
Da brezeg d'ar Vretoned
E kasas prim hon zant.
Kalz en deus sklerijennet :
N'ouzon pet mil ha kant.
7. Da veva da Lanvode
E ya, skuiz gant an trouz ;
Met an dud en em vode
En dro d'e lochenn blouz.
Ha neuze, d'eun enezig
Leun a aered, e tec'h ;
Eno al lóned euzik
'N eus lac'het holl hep nec'h.